

Fañch an Uhel

Ar falher

Selaouit du-hont ar Falher,
O lemma e falh 'tal ar ster.
Krenit, yoet glaz ha c'hwi bleuniou,
Krenit, hennez eo an Ankou !

M'hen gwel e korn ar prad du-hont,
Gand e zremm rust ha divergont ;
Lemma 'ra e falh o kanañ :
« Troha mad 'raio », emezañ !

Allaz ! miz Even 'zo degouezet,
Ha dre-oll bremañ 'vo falhet,
Ar yeot er parkou, er pradou,
Ha gante, siwaz ! ar bleuniou.

Evnedigou, na ganit ket,
Poan 'ra d'am halon ho kleved ;
Tao, durzunell, tao, laouenan,
Alhweder, paouezet ho kan !

Bleuniou bihan ker koant er prad,
Gwir blijadur an daoulagad,
C'hwi ar re¹ 'm-eus kement karet,
Ma halon a zo glaharet !

Med c'hwi, da vloaz, a deuo c'hoaz,
Bleunigou² gwenn, melen ha glaz.
C'hwi 'vo aze laouen ha koant,
Haqg an oll ho sello gand c'hoant.

Med me ne vleuin ken, siwaz !
Ha pa deuo ar Falher braz,
Evid biken e vin falhet,
Ha ma deziou 'vo tremenet !

Nann ! Nann ! n'eo ket gwir kement-se,
Rag me 'azvevo c'hoaz eun de',
Leh emañ ar haerra bleuniou,
En liorz Doue, en Neñvou !

Kerarborn, d'ar 25 a viz Even, 1869.

¹ ar re : pere, er skrid orin.

² Bleunigou : bleunouigou.